


L'age Bretonne

Kantig St Yan-Vadezour

Ce cantique est chanté dans maintes paroisses du Léon, au moment où le clergé, sorti processionnellement de l'Eglise, allume le « tantad » ou feu de joie. Nous le recommandons à nos lecteurs qui le chanteront peut-être eux-mêmes, mardi soir, autour des bûchers de leurs quartiers respectifs. Nous attirons leur attention sur le pittoresque qu'il y aurait à grouper autour du chanteur principal, un chœur d'enfants, non seulement pour chanter le refrain, mais et surtout pour clamer cette sorte d'affirmation qui se trouve à la fin du second vers...


DISKAN :




Em - ban - ner hras ar bi - ni - jen Hi-



rio se - la - cuit bor pe - den — Sant



Yan — Ka - bet hoc'h bet gant Hor Zal - ver O'houi



'zo pro - fet, c'houi 'zo mer - zer

Etouez bugale ar merc'hed
Biskoaz ne-z-euz ket bet kavet — nikun —
A ve brasoc'h eget Sant Yan,
Jezuz hen lavar e unan.

Yaouankik c'hoaz el leac'hiou gouez
Hoc'h bet kaset gant an elez — Sant Yan —
Pell diouz an dud, tost da Zone :
C'houi 'jomas pur korf hag ene.

Na rust eo bet ho pinjen,
Kroc hen kanval en ho kec'hen — Sant Yan —
Biskoaz na gwin, na tamm bara.
Grisiou c'hoero evit beva.

Dre nerz ho mouez eil Elias
An devert oll a dregernas — e reas
Kalz pec'herien deuas d'ar Jourdin
O skeï gant keuz war o feultrin

Sethu Jesus, Salver ar bed
O tont da veza badezet — Jesuz —
En er grena e skuiljoc'h dour
War benn ho mestr, Yan-Vadezour !

Na krenit dirag Mestr ar bed
Dirag an dud ma greuit ket — Sant Yan —
Tavit, tavit tud digaloun
Ar profet bras n'oar ket kaout aoun

« Selaou Herodez te 'ra fall
« Derc'hel ganez pried eun all : — selaou —
« Varnot ha varni hep dale
« E pouezo dourn justis Doue. »

Eur c'hreg gant he merc'h danserez
A reaz d'eoc'h-hu koll ho puez — Sant Yan —
Malloz d'an danz ha d'ar visou
Goad hag ifern ouz o seuliou !

Var eur plad e kreiz eur banked
Ho penn santel 'oue digaset — Sant Yan —
« Sell ouz penn Yan, Herodez kriz
« Ar penn-ze a veli noz-deiz ! »

Mervel zo berr, dir ar c'hleze
D'ar merzer 'oue alc'houez an nev — e oue —
Na c'houi zo kaer e lez hon Tad
Badezour, badezet er goad !

Pactr LEON